


GOUEL MARIA HANTER-EOST

G. ELIES



Diskan $\text{♩} = 66$ ♩

Kanomp meuleudi ar werc'hez

Vari Pignet d'an Nenv korf hag e-ne kanomp me-

Nenv korf hag e-ne

Pa deu an drouk-spered dre ar c'henta pe-

c'hed da c'houarn hon Tadou vit sec'ha o dae-

lou Dou-e leun a dru-ez a bromet ar werc'hez
d'an disken.

DISKAN

Kanomp meuleudi
Ar Werc'hez Vari,
Pignet d'an Nenv
Korf hag ene !

I
Pa deu an Drouk-Spered
Dre ar c'henta pec'hed
Da c'houarn hon Tadou
'Vit sec'ha o daelou
Doue leun a druez
A bromet ar Werc'hez.

II
Hag epad kantvejou
E c'hedas ar boblou
Ar vaouez vuzudus,
Ar vamm drugarezus
A zougfe sklerijenn
D'o c'halon en anken.

III
Gwerc'hez mamm d'ar Zalver,
Dirak ar bed dister,
Ha koulskoude Mari
N'ez eus ket par d'ezi,
Ken glan eo he ene
M'eo mellezour Doue.

IV
Bepred ouz e bedi,
Atao prest da zenti :
"Servicherez Doue".
Dirak eur seurt ene,
An elez en dudi
A deu holl da stoui.

V
An tenzor ar c'haera
Na c'helle ket breina
Evel hor c'horf d'eomp-ni.
Douget eo bet Mari,
Lilienn c'hlan Doue,
Gant an elez d'an Nenv.

VI
Tabernakl a c'hlanded
Tri Ferson an Dreinded,
Setu kalon hor Mamm
Chomet bepred divlamm ;
Ra deuo d'hor sikour
Enep hon enebour.

NIHIL OBSTAT.
9 ebrel 1954
J.-R. GUÉGUEN D. C. E.

IMPRIMATUR.
Kemper, 20 ebrel 1954
J. BELLEC V. V.